

**SESSION 2017**

**CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE  
DE RECRUTEMENT DE PROFESSEURS DES ÉCOLES  
SPÉCIAL LANGUES RÉGIONALES**

**BRETON**

**ÉPREUVE ÉCRITE D'ADMISSIBILITÉ**

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique est rigoureusement interdit.

**Durée de l'épreuve : 3 heures**

**Coefficient : 2**

## MORSE ENOET D'AR YAOU

D'ar Yaou n'em beze morse amzer da vezañ enoet. Pa veze brav an amzer ez aen, hervez ar mare, da glask delioù, geot, blañch pe raden. Gwechoù all ez aen da glask boued d'ar c'honikled, pa 'm  
5 beze, rak n'em beze ket a chañs ganto hag alies e varvent gant ar red-kof. Gwechoù all c'hoazh ez aen da glask koad da c'hwezhañ an tan diouzh ar beure pe d'ober krampouezh. Pa n'em boa netra d'ober, pe ma teue unan bennak da glask ac'hanon ez aen da c'haloupat war ar maez. Bez' e veze devezhioù er goañv, ma ne dave ket ar glav. En degouezhioù-se, anat eo, ne c'hellen ket mont d'ober un droiad er parkeier nag er c'hoadoù. Neuze e raen kaouedoù pe c'hoarielloù. Evel ma tere ouzh mab ur marichal em  
10 boa ar pep retañ eus an ostilhoù : ur morzhol, ur c'henn da servij da annev, ur gizell yen da droc'hañ tachoù pe orjal pe da freuzañ kasedoù, un durkez da dennañ tachoù, hag ur minaoued da doullañ. N'em boa nemet ur c'hozh heskenn, avat. Gant ar binvioù-se e ranken ober. Pa'm boa ezhomm da doullañ koad tev e raen un toull kentañ gant ur minaoued ha da c'houde e lakaen un ibil houarn en tan ha pa veze ruz e kresken gantañ an toull. En em servij a raen ivez kalz eus kontilli an ti. Pa riskle ar gontell avat, gwa d'am  
15 daouarn pe d'am bizied ! Un tamm morzhol war ar biz ne rae ket a vad kennebeut ! « Ar vicher oc'h antreal, » a lavare din va zad pa wele un troc'h pe ur vloñsadenn en ur biz. Evit ober kaouedoù e oa ret kaout tammoù drez eeun ha tev, evit ar framm, ha bizhierigoù haleg pe ozilh d'ober ar c'hostezioù, ar foñs hag al lein. Pa'm beze an danvez ret ez en em lakaen eta d'ober ur gaoued, evidon pe evit ur c'hamalad na oa ket dornet mat a-walc'h d'hen ober e-unan. Brav e kaven ur gaoued  
20 gant he bizhierigoù haleg pe ozilh dirusket mat. Ha pegen skañv e oa ar c'haouedoù-se ! An diaesañ d'ober, marteze, a oa kenfeuriañ mat kenetrezo hed, treuz hag uhelder ar gaoued, evit ober un dra genglotus. Pa n'em boa ket a zanvez en a-raok n'hellen ket mont d'e glask kennebeut dindan ar glav, neuze ez en em lakaen d'ober ur vilin-zour, pe ur sifoc'hell-zour, pe ur c'hoariell all bennak, hervez an danvez a vefe ganin evit hen ober. Evurus e vezen pa veze degaset din ur c'hased goullou eus ti ar  
25 marc'hadour gwin dre vras. Se 'oa ar c'hoad nemetañ a c'hellen kaout. An tachoù dioutañ a viren evel traoù prizius rak n'em boa ket a arc'hant da breñañ tachoù nevez. Ar re a dennen diouzh ar c'hoad-se – peurvuiañ koad sapr – a eeunen diouzhtu war ar c'henn hag a lakaen er voest am boa da zastum tachoù boteier. En em ziduiñ a raen hag evurus e vezen o klevout ar glav o kouezhañ war an doenn ha war an douar, e surentez e toull dor ar c'hraou, oc'h ober ul labour a blije din !  
30 Pa veze brav an amzer, evel-just, e kaven gwelloc'h bezañ er-maez. An natur e Plougastell a oa dispar : e-leizh a barkeier bihan gant kleuzioù tro-dro goloet a wez : pep park en doa e liv hervez ar pezh a greske ennañ, ha pep koulz amzer a zegase ur gwiskamant nevez da bep hini. Ni a ouie un tamm eus an amzer : gouzout a raemp, da skouer, peur e kouezhfe ar glav hep ehanañ ha peur ne vefe nemet barradoù ur wech an amzer. A-wechoù, eta, ne rae ket a c'hlav pa loc'hemp, met a-vec'h en em gavet e Gwaremm ar  
35 Roc'h e welemp ur barrad o tont. Dont a rae eus ar Vilin Wenn, gwelout a raemp anezhañ o tostaat, neuze ez en em lakaemp da redek hag e tizhemp gwasked ur c'hleuz a-raok bezañ glebiet hag e welemp ar glav o kouezhañ e-biou dimp, kaset gant an avel greñv. Pegen evurus e vezemp en degouezhioù-se : hor skiantoù gwerc'h a zizoloe, a floure, a zebre, a eve, a anale an natur !  
40 Pep hini en e gorniad a oar pelec'h e c'heller mont ha pelec'h ne zleer ket mont. Klevet em eus Brestiz o lavarout e veze tennet warno pa'z aent en ur parkad sivi. Em c'horn-me ne oa nemet un nebeud parkeier dindan sivi ha ne gredan ket e vefe bet tennet warnomp ma vefemp aet enno. Perc'henned a oa, se'zo sur, na blije ket dezho gwelout bugale o vont dre o farkeier. Dre vras e c'hellemp mont e-lec'h ma ne oa ket stanket. Pa welemp ur gloued uhel serret mat ha diwallet mat gant bodoù spern, drez pe lann, pe gant orjal-drein, e komprenemp diouzhtu ne felle ket d'ar perc'henn ez afemp e-barzh. Met e seurt parkeier ne  
45 oa peurvuiañ netra dedennus da welout. Ar pezh a zedenne ac'hanomp a oa an douaroù tirien gant bodoù lann, stank enno an neizhi.

Tennet eus *Pinvidigezh ar Paour*,  
gant Goulven Jacq  
Al Liamm, 1977

50

## I. Goulennoù : respontit d'ar goulennoù gant frazennoù

- 1- Eus peseurt korn-bro eus Breizh zo kaoz amañ ? Kemerit harp war an destenn evit arguziñ. 1 poent
- 2- Ha disheñvel e oa diduamanchoù an daneveller diouzh liv an amzer ? Displegit. 2 boent
- 3- Penaos e teue a-benn an daneveller d'ober kaouedoù pe c'hoarielloù ? 2 boent
- 4- Da betra e servije ar pezh a veze savet gantañ ? 1 poent
- 5- Peseurt dañjerioù a zo gant al labour-dorn-se ? 1 poent
- 6- Peseurt darempredoù a oa etre an daneveller hag e dad ? Displegit. 1,5 poent
- 7- Peseurt anaoudegezh en doa an daneveller eus an natur ? 2 boent
- 8- Diskouezet e ouie bugale diwar ar maez o gwirioù hag o deverioù. 1,5 poent
- 9- Petra a soñj deoc'h a rae ar vugale gant an neizhi ? 1 poent
- 10- Savit poltred an daneveller. 2 boent

## II. Troidigezh

Troit e galleg adalek al linenn 39 « Pep hini en e gorniad... » betek ar fin « ...stank enno an neizhi. »  
5 poent